



AN ORIANT KANAÑ HA DAÑSAL ATAV

53^{vet} abadenn Emvod ar Gelted a oa gouestlet
d'ar yaouankiz er bloaz-mañ.

PAJENN 2

© Xliffrom TOKYO

BREIZH

EN EM OBER OUZH CHEÑCHAMANT
AN HIN EN TACHENNOÙ-KAMPIÑ

PAJENN 3

SPORT

SACHAÑ WAR AR GORDENN
ER C'HOARIOÙ OLIMPEK

PAJENN 3

UN EMGAV GANT

ANNA
AN DUIGOU

PAJENN 12

AR SIZHUNIEG EMBANNET GANT KEIT VIMP BEV ABAOE 2005

75

**PLANTIT BREZHONEG
ER GÊR !**

Kelaouennoù · Romantoù · Albomoù · Bannoù
www.keit-vimp-bev.com

Joan-Pere Pujol
LES COLONISÉS DE L'HEXAGONE
PENDANT LA GRANDE GUERRE 1914-1918

Yveline Collé & Philippe Joubert
An tri evnig
Les trois oiselets

Genel Pujol
HISTOIRE DE CATALOGNE
Le Grand Condé

Jean-Paul de Nulman
Les signes de métier
Histoire de l'artisanat et de l'apprentissage en Bretagne

Philippe Joubert
Dictionnaire Mythologie Religion Celtiques
Publié de 1998 à 2005

yoran-embanner.com

EMVOD AR GELTED : PLAS D'AR YAOUANKIZ, BARREK HA MENNET !

Abalamour d'ar C'hoarioù Olimpek e oa bet rediet aozerien Emvod ar Gelted da lakaat ar festival da gregiñ da vat d'al Lun 12 a viz Eost. D'ar Sadorn ha d'ar Sul a-raok e oa bet kenstrivadeg ar bagadoù, binioù bras ha gaita, abadennoù Cecile Corbel ha Rodrigo Cuervas. 200 000 plas gwerzhet (badjoù e-barzh), 650 000 a dud, gant 1582 den a-youl vat, brav e oa daoust d'an holl skoilhoù a oa war an hent.

Pariadenn ar bloaz-mañ a oa doubl : lakaat an dibunadeg veur d'ar 15 a viz Eost, ha pediñ yaouankiz ar broioù keltiek, ha ne oa ket ur vro evel boaz. Deuet int a-benn d'ober bourrapl, gant un devezh hanter glav ma ne oa ket bet aes evit rastellat moneiz (tavarnioù hag

predtiez dilabour...) met ur bern traoù zo bet pozitivel memes tra.

Ur mor a dud

Leun-chouk e oa al lec'hioù : ar C'hleub gant 3000 den bemnoz, Kae Breizh leun a dud gant ul leurenn yaouankiz (Seim, Segal, les Aventuriers du désert, Elips...) varrek, sal Carnot gant ul lostad 100 a dud o c'hortoz ur plas er-maez (kentelioù dañs goude merenn, fest-noz war-lerc'h), Stad ar Vouster leun evit an teir nozvezh "Horizons celtiques"... Diaes e oa kavout ur plas evit kerzhout meur a wech !

Plas ar brezhoneg, emit-hu ?

Aet eo war-raok : tri emvod zo bet gant ur gomision renet gant Régine Barbot, sekretourez veur ar festival



Tri sonadeg en doa kinniget Carlos Núñez er C'hoariva d'ar 15 ha d'ar 16 a viz Eost. © Jérémy Kergourlay

asambles gant rener ar festival, Jean-Philippe Maurras. Ur stummadur e brezhoneg zo bet kinniget evit tud an tavarnioù. Stalioù "flash" deskiñ brezhoneg gant Mignoned ar brezhoneg, gant ti-krampouezh Diwan, filmoù e brezhoneg e Cine FIL meur a wech (Anne Gouerou, Skol Diwan an Oriant...), ur badj gwenn evit ar re o teskiñ, ur badj du evit ar re a gomz brezhoneg mat. Pep abadenn kinniget e brezhoneg, pe e vefe er C'hoariva meur, e Palez ar C'hendalc'hioù, er sinema... Un dibunadeg veur d'ar Merc'her gant bugale skolioù Diwan, Div Yezh, Divaskell,

80 bugel eus bro an Oriant o kanañ ur sonenn nevez kompozet gant ur skipailh renet gant Elodie Jaffré. Un arload e brezhoneg war ar pellgomzerioù, div brezegenn e brezhoneg...

Ha krennarded Kembre leun a nerzh war al leurenn, krouidigezh Llewenn, bugale dañserien "Dañsomp ar vro" : biskoazh ! Aze eo splann : ne c'hello ket mui ar festival ober hep ar re yaouank, barrek ha gouest da seniñ, da ganañ, da zañsal... kenkoulz hag ar re vras !

Fanny Chauffin

Emvod ar Gelted e 2025

Ar 54^{vet} abadenn a vo dalc'het etre ar 1^{añ} hag an 10 a viz Eost 2025. Degemeret e vo gant ar festival "kendirvi Amerika, eus Akadia da Louiziana, o tremen dre Kebek, Brunswick Nevez, ar C'hab Breton, Skos Nevez, Boston ha New-York".



Skipailh ar gazetenn "Festicelte", kroget ganti 14 vloaz zo. © Mélanie Noëson

BERR-HA-BERR ER BED

Kanaky

Pevar daneveller arbennik eus Aozadur ar Broadoù Unanet (ABU) o deus disklêriet bezañ chalet gant ar pezh a c'hoarvez da Ganakiz. "Klask diframmañ emglev Noumea a wallgas kalzik gwirioù mab-den hag a ra gaou ouzh an argerzh didrevadenniñ". Hervezo "n'en deus ket doujet [gouarnamant Frañs] gwirioù diazez pobloù henvroat hag ensavadurioù Kanaky — ar Sened kustumel en o zouez — da gemer perzh, da reiñ o soñj, da vouezhiañ ha da genasantiñ en un doare fraezh ha sklaer en a-raok". Goulenn

groñs a reont e vefe "torret penn-da-benn" ar raktres lezenn a cheñchfe kenaoz ar c'horf dilenn, ha neket en ampellañ hepken. Gant 6 manifeste lazhet, 169 den gloazet hag ouzhpenn 2200 manifeste harzet pe toullbac'het en un doare direizh e lakaont war wel : "an diouer a vuzul er mod m'eo bet implijet an nerzh a-enep ar vanifesterien ganak hag an doare flastrus ha lezennel da renkañ an tabut".

Norzhiwerzhon

Berzh a ra an iwerzhoneg er skolioù : an niver a dud

a laka o anv evit deskiñ iwerzhoneg a gresk betek dont da vezañ — en-dro — an eil yezh studiet ar muiañ evit an "A level" (par d'ar vachelouriezh e Frañs). Ar spagnoleg eo ar yezh a vez dibabet ar muiañ, emañ ar galleg en trede plas hag an alamaneg er pevare.

Stadoù Unanet

E Kenemglev an demokrated e Chicago en doa roet Joe Biden ar vazh-test da Gamala Harris d'an 20 a viz Eost. Diwar-vremañ emañ-hi war ar renk en un doare ofisiel evit dilennadeg ar prezidant. Ar prezidant

kent Barack Obama en deus kemeret ar gaoz evit disklêriañ "eo prest Kamala Harris evit ar vicher" a-raok echuiñ gant ur "Yes, she can !", e-giz ur serr-lagad d'e lugan dezhañ "Yes we can" e 2008.

Gaza

Un enklask zo bet savet gant trizek media, kenurzhiat gant *Forbidden Stories* (lec'hienn internet ar gevredigezh *Freedom Voices Network*, krouet e 2017 gant Laurent Richard, kazetenner gall, ha soutenet gant *Reporters sans frontières*). Embann a ra ez eus bet lazhet 18

kazetenner e Gaza gant dronoù israelian. 170 kazetenner zo bet lazhet eno abaoe miz Here 2023 er brezel a zo an hini lazhus abaoe an Eil Brezel-bed evit ar gazetennerien.

Meurvor Atlantel

E-pad 15 miz o deus souldommet meurvorioù ar bed met abaoe miz Mae e verzher un anadenn gontrol e takadoù zo eus ar meurvor Atlantel, hervez ar gelaouenn saoz "New Scientist". Abaoe tri miz e yena buanoc'h eget biskoazh an eil meurvor brasañ er bed.

BERR-HA-BERR E BREIZH

Karaez

15^{vet} abadenn ar festival Motocultor a oa bet dalc'het eus ar 15 d'an 18 a viz Eost. Evit an eil gwech e oa e Karaez. 54 000 a dud zo bet war ar pevar devezh. Alan Stivell a oa war al leurenn d'ar Yaou, prometet en doa un eurvezh a "rock keltiek" ha berzh he deus graet e sonadeg. Er bloaz a zeu e vo dalc'het ar festival sonerezh metal eus ar 14 d'ar 17 a viz Eost. 12 anv zo bet roet dija, en o zouez ar strollad milvrudet Machine Head.

Brasparzh

45^{vet} Skol-hañv brezhoneg Ar Falz-Skol Vreizh a oa bet dalc'het etre an 18 hag an 23 a viz Eost. An 60 stajiad-ez a oa dispartiet e 5 strollad deskiñ. Atalieroù dañsal ha kanañ a oa kinniget evel boaz, koulz hag atalieroù natur e Menez Are.

Kastellin

Rener ti ar c'hazetennoù, Frédéric Vasseur, en doa c'hoant da gavout tud evit en erlec'hiañ abaoe 3 bloaz met ne gave den ebet. Ur c'hevredad kevelouri a laz stroll (KKLS: SCIC e galleg) a oa war ar stern : *La maison qui pousse* [s.o. niv. 961 Ya!]. D'ar Merc'her 29 a viz Gwengolo e vo serret an dorioù evit ober ur renabl a-raok cheñch ha reiñ alc'hwezioù an ti d'ar 183 den a gemer perzh er KKLS.

Kemper

Ur chanter a-stroll a vo dalc'het e Ti ar Brug d'an 29, d'an 30 ha d'an 31 a viz Eost evit "echuiñ prientiñ degemer skolajidiha skolajiadeged Diwan Kemper hag ar feurmerien da zont". Merete vez allec'hgant ar gevredigezh Kroashent Kerne (degemer@kroashentkerne.bzh)

EN EM OBER OUZH CHEÑCHAMANT AN HIN EN TACHENNOÙ-KAMPIÑ

Emañ Unaniezh Vreizhat al Letierezh en Aer Vras, a zo bodet enni tachennoù-kampiñ, o paouez embann ur sturlevr lec'h ma vez diskouezet penaos ober evit en em ober ouzh cheñchamant an hin.

Titl ar sturlevr eo : "Azasaat ar glasvez ouzh cheñchamantoù an hin". Embannet eo bet evit ar verourien tachennoù-kampiñ rak d'ober o devez ouzh barroù-amzer, sec'hor, kiladenn an aod. Er sturlevr e c'heller lenn kuzulioù pleustrek evit a sell ouzh an dibab plant ha gwez a vo ar gwellañ en amzer-da-zont. Hervez ar pezh a vez plantet ne vez ket implijet ar memes kementad a zour. Displegañ a reer ivez interest kement plantenn evit ar vevliesseurted. Anv zo ivez eus an doare da verañ al lastez glas.

Memes ma n'eo ket Breizh bro an taniou-gwall ez eus ul lodenn diwar-benn an doare da stourm ouzh an tan rak riskloù a vez ivez, hag e vo muioc'h-mui gant an amzer o vont war dommaat. "Ur benveg ret eo ar sturlevr-mañ evit hon izili", eme Mathilde Raphalen hag Albane Ganga eus Unaniezh Vreizhat al Letierezh en Aer Vras. "Reiñ sikour d'ar verourien tachennoù-kampiñ da dalañ ouzh daeou an endro,



Ar sturlevr-se zo bet savet evit an tachennoù-kampiñ, ar c'hreizennou vakansou, ar c'hèriadennou vakañsiñ hag an herberc'hioù yaouankiz. © Capfun

koulz ha derc'hel kaerder ha liesseurted natur Breizh, a faot deomp ober", emezo.

Dibaboù da lakaat e pleustr

Reolennoù zo a rank an tachennoù-kampiñ ober ganto rak degemer a reont tud ha dre-se n'int ket evit ober forzh petra e-keñver ar surentez. Daoust da se eo frank an traoù a c'hellont seveniñ evit en em azasaat ouzh cheñchamantoù an hin. Disheoliennou a c'hellont staliañ. El lochennoù strinkerezh eo posupl damantiñ d'an dour gant munuterioù pe gouleier da

vroudañ ar gamperien da chom nebeutoc'h a amzer dindan ar strinkerezh. En amzer-da-zont ne vo ket ar mobile-home tre evel bremañ. Gwenn e vo o zoennoù moarvat, ha disheolieroù a vo ingal e tu an heol evit ma ne domme ket bannoù an heol o mogerioù pa vo tomm-gor an amzer.

Ar pezh a vo graet dreist-holl eo plantañ e-leizh. N'eus ket gwelloc'h eget glasvez evit degas freskter. N'eo ket Fulup Morantin, merour tachenn-gampiñ *La Chênaie* e Pornizh, a lavaro ar c'hontrol. E penn ur vagerezh gwez e oa a-raok mont da verour tachenn-

gampiñ. Pa vez kaoz a blantañ e oar diouzh ar vicher eta. "Daou vloaz goude m'int bet plantet o deus kresket ar gwez pe ar plant eus 50 pe 60 santimetr", emezañ, o soñjal er pezh en deus graet dija. Gwez-derv Amerika, skav-gwrac'h, onn, a bep seurt en deus plantet. Dre m'en devoa dalc'het gwez bihan eus ar vagerezh a laboure enni a-raok n'eo ket re ger evitañ degas glasvez en dachenn-gampiñ nav hektar emañ o labourat enni, met gouzout a ra en dije kousket ker a-walc'h a-hend-all.

Y.Y. ar Gov

SACHAÑ WAR AR GORDENN ER C'HOARIOÙ OLIMPEK

Abaoe pell zo n'eus ket mui eus ar sachañ war ar gordenn er C'hoarioù olimpek. E-touez ar re a faot dezho e vefe adlakaet ar sport-se war ar roll ez eus ur Breizhad, Serge Falezan.

Karget eus ar sachañ war ar gordenn e Kevredad Broadel ar C'hoarioù diwar ar Maez eo Serge Falezan, a orin eus Gwengamp. E-pad ar C'hoarioù olimpek e oa aet da bark ar Villette, asambles gant tud all, da ziskouez penaos e vez c'hoariet ar sport-se. Pal an devezh e oa diskouez penaos tremen eus ur sport pleustret gant ar bobl d'ur sport ofisiel. Un taol-esae e voe an devezh-se. "Un nebeud traoù hon eus da adwelet", a anzav Serge Falezan. "Ur pal a rankomp lakaat d'ar pezh a faot deomp kinnig : e kaier ar c'hargoù emañ an tizh, plas ar merc'hed, ha padelezh pep krogad. Arabat na badfe re bell pep krogad. Diskouezet e



Skipailh Frañs. © FNSMR

voez ofisiel ganeomp e-kerzh ar C'hoarioù olimpek a zeu e 2028." Spi en deus e c'hellfe neuze dont da vezañ ur sport degemeret gant renerezh ar C'hoarioù olimpek a-benn c'hoarioù 2032.

Sportoù nevez bep pevar bloaz

Arabat eo krediñ e chom stabil listenn sportoù ar C'hoarioù olimpek. Er bloaz-mañ e oa bet pevar sport nevez : seurf, skateboard, breakdance ha kraperezh. Sportoù zo zo bet paouezet ganto met deuet int en-

dro en un doare disheñvel. C'hoariet e oa bet rugbi gant pemzek c'hoariet betek 1924. E-pad bloavezhioù ne voe ket mui krogad ebet met setu eñ adarre azalek 2016, gant seizh c'hoariet hepken avat. Er bloaz-mañ eo bet tapet ar vedalenn aour gant Frañs. Polotenn vask, savat, polo, koked, ha sachañ war ar gordenn zo bet anezho dija ur wech da nebeutañ. N'eo ket dibosupl e teufe ar sachañ war ar gordenn endro eta. Diwar an taol-esae bet graet e park La Villette en deus Serge Falezan ur soñj war an doare da zegas

ar sachañ war ar gordenn en-dro. "Betek-henn, ar pezh zo ret kaout gant Kevredad Etrebroadel ar Sachañ war an Tortis (TWIF) eo skipailhoù seizh pe eizh den dre vras e pep tu. Memes mod eo evit ar merc'hed hag evit ar baotred. Skipailhoù gant peder flac'h ha pevar faotr e pep tu a gaver ivez. Er C'hoarioù olimpek, ar pezh a vo goulennet ganimp, me 'soñj, e vo kaout krogadoù berroc'h, gant nebeutoc'h a dud er skipailhoù, o tremen eus eizh sacher da c'hwec'h."

Y.Y. ar Gov

KALOTENN SANT-JOZEF

Bez' eo kalotenn Sant-Jozef un duchenn 292 metr uhelder dezhi. Lein uhelañ ar Mor-Bihan eo met n'eo ket ar pennlein memes tra. An departamant-se zo en e uhelañ e komun Gourin gant 301 metr uhelder. An daouzekvet lein uhelañ e Breizh eo kalotenn Sant-Jozef. Emañ e komun Langoned.

Diwar kern an duchenn-se, a-drugarez ar gwel panoramek kelc'hiek, e vez damwelet koadeier ha lanneier ar Mor-Bihan, Aodoù-an-Arvor ha Penn-ar-Bed. Eus tu an hanternoz eo bevnet an dremmwel gant krec'h tost ar Menez Du hag eus tu ar gevred gant linenn kribenn Sant-Tudal. Eus tu ar su hag ar mervent eo posupl gwelout pell-tre abalamour d'an diouer a wir dorosennadurioù¹. Ouzh troad ar galotenn e vez damwelet bourc'h an Drinded Langoned ha pelloc'h eus tu ar gevred, bourc'h Plourae.

Un dachenn naturel vresk

Dalc'het eo bet kalotenn Sant-Jozef e-touez 91



An dremmwel eus lein an duchenn. Bourc'h an Drinded Langoned ha kêriadenn Botkelvez en traoñ. © Lanzonnet

lec'hienn dibar er Mor-Bihan evel tachenn naturel vresk evit ar pezh a sell ouzh an ekologiezh hag an dremmvro² ha disklêriet lec'hienn Natura 2000 lec'h ma vez gwarezet ar metoù hag ar spesadoù loened ha plantoù. Er bloavezhioù 50 e oa liammet-tre he strud ouzh an doareoù labourdouar ha korvoet-tre : graet e veze teil gant he brug ha gouzilh gant ar flach³ (ur c'heotegenn)... Hiziv an deiz ez eus lann gant balan-brug⁴ ha brugoù melen⁵ ha brugoù-kroaz⁶, flach ha brouvroen-du⁷ war kalotenn Sant-Jozef.

Lanneier ar galotenn zo yac'h zoken ma'z eus lod eus an tachadoù lann hag a zo aet da fall abalamour d'an drez ha d'ar raden bras aloubus hag abalamour d'ar peuriñ betek re kaset da benn war foeneier lein an duchenn.

Ul lec'hienn dedennus-bras eo evit ar pezh a sell ouzh an evezhierezh ornitologel peurgetket. Plijout a ra ar galotenn haghezwardroioù da dri spesad skouled⁸. Ar skouled gris⁹ a vev eno dibaouez. Ar skouled louet¹⁰ a dremen ar goañv hepken eno. Ar skouled glas¹¹ a

hemolc'h a-hed ar bloaz eno. Damwelet eo bet an adaned-noz¹² hag an devediged ruz¹³ da vare an neizhañ.

Diwar kêriadenn Yun ez eus un hent meinek hag a ya betek ur wenodenn rozellek¹⁴ hag a gas d'al lein krenn lec'h ma'z eus un daol heñchañ hag a ro tu d'ar bourmenerien d'en em lec'hiañ.

Kalotenn Sant-Jozef a ya d'ober un tennad eus troiad vale ar Menez du gant iliz an Drinded Langoned hag he feuten vras. Evit gwir ez eus div droiad : unan vras 11 km dezhi hag unan vihan 5 km

dezhi. Ur valeadenn vras zo d'ober aze hag a ro tro da zizoleiñ kened ar c'horn-bro.

Jil ar Bourlout

- ¹torosennadur : relief
- ²dremmvro : paysagère
- ³flach : Molinie
- ⁴balan-brug : callune, fausse bruyère
- ⁵brugoù-melen : bruyère cendrée
- ⁶brugoù-kroaz : bruyère à quatre faces à fleurs blanches
- ⁷brouvroen-du : scirpe cespiteux
- ⁸skoul : busard
- ⁹skoul gris : busard gris
- ¹⁰skoul louet : busard Saint-Martin
- ¹¹skoul glas : busard cendré
- ¹²adan-noz : engoulevent
- ¹³devedig ruz : fauvette Pitchou
- ¹⁴rozellek : escarpé

ANAVEZOUT AR PLANT A-DRUGAREZ UN ARLOAD


Gant an arload *PlantNet*¹ e lener war skramm ar poellgomzerioù anv ar blantenn raktal goude bezañ tennet he foltred a zo keñveriet war-eeun gant miliadoù a fotoioù strollet gant ur rouedad a louzaouerien. Un arload hag a zegas soñj eus *Shazam*, gant ur blantenn e-plas un enrolladenn muzik.

Aes-kenañ eo ar mod implij, rak ur wech choazet e-touez 4 rumm (bleunioù, delioù, frouezh pe rusk) n'eus nemet tapout ur poltred dre an arload hag ar respont a vez roet diouzhtu, hep ober netra all. Gwelloc'h eo, memes tra, implijout ul luc'hskeudenn a-feson war ur foñs unvan eget luc'hskeudenn un delienn skoet gant ar seizh avel.

Klask a ra an arload fotoioù heñvel-mik er bank roadennoù *Tela Botanica*², ennañ ouzhpenn 300 000 luc'hskeudenn ha 6000 spes.

Gant an holl

Ensavadurioù bras zo a-dreñv ar benveg-se,



E 2009 e oa bet roet lañs d'ar raktres *PlantNet*. E 2015 e oa bet digoret an arload d'an holl. © *PlantNet*

evel an ensavadur broadel klaskerezh agronomek (INRA), ar greizenn genobererezh etrebroadel e klaskerezh agronomek evit an diorren (CIRAD) hag ensavadur broadel an enklask war ar stlenneg hag an emgfreouriezh (INRIA). Kreskiñ a ra ar bank roadennoù a-feur ma vez lakaet fotoioù ha titouroù gant ar valeerien, al louzaouerien a-youl vat hag ar re a-vicher, a gemer perzh. Ar respontoù roet d'ar valeerien a servijo

da binvidikaat gouiziegezh ar skiantourien. Evel-se e vo savet kartennoù resisoc'h-resisañ hervez niver ar goulennou.

Talvoudus eo evit an daou du, ar baleer hag ar skiantour, a denn splot an eil eus egile. Seul niverusoc'h e vez ar roadennoù, seul vuanoc'h ha seul welloc'h e vez an anv roet evel-just. Ma'z eo treut an titouroù er bank roadennoù dre ma n'eus ket a-walc'h a skeudennoù war ur blantenn e vo diaes d'an

arload hec'h adkavout ha reiñ titouroù diwar he fenn.

Titouroù war ar fiñv

Evezhiet e vez ar goulennou gant skiantourien hag a glask heuliañ ha dielfennañ fiñvadennou ar plantennoù, dreist-holl ar plantennoù en arvar hag ar spesadoù aloubus. Splann eo an disoc'hoù kentañ, ar fiñvadennou a ya war vuanaat dre ma ya war washaat cheñchamant an

hin ha liesseurte ar vuhez a ya war an diskar.

Kinniget eo d'an implijer an anv latin hag ivez an anv e yezh ar vro. Luziet e oa bet ar poent diwezhañ rak a-wechoù ez eus meur a anv er yezh voutin evit ur spes hag en hevelep doare un anv nemetken implijet e meur a vro hag a genglott gant meur a spes.

Ne vez ket implijet ar fotoioù nevez war-eeun gant an arload. Da gentañ e vez kadarnaet o anv a-drugarez al lec'hienn *IdentiPlante* (liammet ouzh *Tela Botanica*), ul lec'hienn ma'z eus ur rouedad a arbennigourien. Da c'houde e vez priziet ar fotoioù a-drugarez al lec'hienn *PictoFlora* dre ur sontadeg hag erfin e vezont lakaet e-touez ar roadennoù gant titouroù a-vil-vern. Setu un arload a ya war-raok a viz da viz, hep re a faziou, hag a vije bet mat-kaer ma vije bet anavezet ar c'hebell-touseg.

Eric Oudart

¹<https://plantnet.org/>

²<https://www.tela-botanica.org/>

BENELOURIEZH

gant Anna Cotty

Gourelouriezh

D'an 23 a viz Mae 2024 e oa ar flammenn olimpek o tremen dre straedoù Bourdel. Kalz a dud a oa deuet d'he gwelet, ha meur a zarvoud a oa bet aozet gant kluboù sport evit lidañ gant an holl ar C'hoarioù Olimpek o tont. An deiz-se a oa bet choazet gant un den evit ober ur gwalldaol e kêr Vourdel. Dre chañs eo bet harzet en a-raok, rak gallout a raje bezañ bet un taol grevus-kenañ.

Hervez ar gazetenn *Sud-Ouest*, ne ouie ket an den e oa ar flammenn olimpek o tremen an deiz-se. N'en doa ket choazet an deiziad-se evit argadiñ ar C'hoarioù Olimpek. C'hoant en doa da enoriñ ar muntrer Elliot Rodger, en doa graet ur gwalldaol d'an 23 a viz Mae 2014 e Isla Vista. An deiz-se e oa bet lazhet c'hwec'h den, e anv ar gumuniezh "incel" (*involuntary celibate* — "dizimez en desped dezho", e brezhoneg). Paotred ha ne deuont ket a-benn da gavout ur vignonez eo an *incels*. Hervezo eo abalamour d'ar merc'hed bezañ drouk ganto.

D'an 23 a viz Mae 2014 en doa c'hoant Elliot Rodger d'en em veñjiñ a-enep ar merc'hed, ha setu perak en doa lazhet kement a dud.

E-barzh al luskad "gourelour" eo bet krouet ar gumuniezh *incel*. Met petra eo ar c'hourelouriezh ? Memes tra hag ar venelouriezh, met evit ar baotred ? Ya, hervezo, met n'eo ket, tamm ebet.

Ma selaouomp ar c'hourelourien, eo bet cheñchet penn d'ar vazh en hor c'hevredigezh abaoe emgannoù benelour an XX^{vet} kantved. Deuet eo ar merc'hed da vezañ mestrezed en hor broioù (ar pezh n'eo ket mat evit hor sevenadur, hervezo), ha bremañ ez eo ar baotred a zo gwallgaset. Hervezo eo aesoc'h an traoù evit ar merc'hed bremañ. Da skouer, e soñj dezho e vez ar varnerien aliesoc'h a-du gant ar mammoù en aferioù torr-dimeziñ. Un nebeud bloavezhioù zo e oa bet gwelet kalz tadoù o pignat war gavroù-houarn evit goulenn ar gwir da welout o bugale aliesoc'h. Boñ, goude an aferioù-se hon eus dizoloet e oa tamallet da veur a hini eus an tadoù-se da vezañ feuls gant o bugale.



© Freepik

Marteze ne oa ket ken souezhus se o defe divizet ar varnerien nompas laoskel an tadoù-se da welout o bugale gwall alies.

Difenn a ra ar c'hourelourien gwirioù ar baotred, met n'o deus ket c'hoant e vefe ingal paotred ha merc'hed, ha setu an diforc'h brasañ etre gourelourien ha benelourezed. Peogwir n'eo ket gwir ar pezh a lâront : n'eo ket ar merc'hed a zo mestrezed en hor c'hevredigezh. Kalz a sifroù,

kalz a studioù zo diwar-benn ar gudenn-se hag an holl a lâar ar memes tra : diaesoc'h eo c'hoazh bezañ ur plac'h eget ur paotr hiziv e Frañs. Stourm a ra ar c'hourelourien evit chom ar mestroù ha nompas evit dont a-benn da gaout ingalded etre paotred ha merc'hed. Soñjal a ra dezho eo pouezusoc'h ar baotred eget ar merc'hed, ha setu perak eo mat dezho derc'hel da zivizañ pep tra e buhez an holl. Divizañ ivez hag-eñ eo dav mervel, war a seblant.

Ha setu un diforc'h all etre gourelouriezh ha benelouriezh : ar venelouriezh n'he deus ket lazhet den ebet. Er c'hontrol eus ar c'hourelouriezh he deus lazhet dija meur a wech. Dre chañs e oa bet harzet an traoù e Bourdel e koulz, a-raok mont da vezañ re c'hrevus.

>> Evit mont pelloc'h : Podkast "Les Couilles sur la Table" niv. 96 gant Victoire Tuillon

KAFE BREZHONEG E LESNEVEN

04/09 : Pevar mous er c'hab Horn gant Herve Peaudecerf

Hirio an deiz ne glever anv eus ar c'hab Horn nemet da vare ar redadegoù-mor pe e vefe an *Arkea Ultim Challenge-Brest* pe ar *Vendée Globe*. Met ar c'hab-se zo bet un hent-mor bras evit mont warzu aodoù kornôg Suamerika pe Norzhamerika pe evit distreiñ eus ar meurvor Habask. Kantadoù a listri ha miliadoù a vartoloded, ur bern Bretoned en o zouez, a dremenas hebioù ar C'hab Horn etre 1820 ha 1925. Deomp da heul Louis, Léopold, Auguste hag Alfred, pevar mous hag a gontas o beaj kentañ e lizhiri kaset d'o familh pe e eñvorennoù bet skrivet diwezhatoc'h. Ganto e tizoloimp peseurt buhez o doa war ar pemdez e bourzh an teirgwernioù pe bedergwernioù-se. Petra 'veze kaset ha degaset el listri-se ? Da belec'h ez aent ? Pegeit e pade beajoù a seurt-se ? Perak e oa bet dilezet al listri-se e-tro 1925 e Frañs pa oa bet kendalc'het d'ober



Herve Peaudecerf zo levraoueger a vicher. E Ti-embann ar Skolioù emañ o labourat bremañ. E dad-kuñv, Michel Houizot, a oa bet kabhorner. Abalamour da-se en doa klasket gouzout hiroc'h diwar-benn ar vartoloded a dremene hebioù ar c'hab Horn. © Herve Peaudecerf

ganto e broioù all (Alamagn, Finland da skouer) ? Evit klozañ e vo lakaet ar gaoz war an doare d'ober enklaskoù diwar-benn ur martolod, pe e vefe bet kabhorner pe get, ha diwar-benn ar beajoù kaset da benn. Un digarez da ginnig al labour boulc'het gant ar gevredigezh "*Cap Horn au Long Cours*".

Lesneven. Sal L'Atelier - 3e - Digor d'an holl. Darempred : 09.83.22.42.96



DANEVELLOÙ

Un danevell ho pefe c'hoant da ginnig evit ma vefe embannet er gazetenn ?
Na chomit ket etre daou ha skrivit deomp !

darempred@ya.bzh

KENTEL YANN GERVEN

Implij niveroù zo e brezhoneg

A) Levezon ar galleg a vez santet e troioù-lavar a vez skrivet hiziv, evel *div wech brasoc'h, *div wech nebeutoc'h, evit treiñ ar galleg deux fois plus, deux fois moins.

E brezhoneg komzet e vez implijet kazi bep gwech ar ger hanter, dirak un anv-gwan pe un adverb en derez uheloc'h (= *comparatif de supériorité*), da skouer :

Troc'h din un tamm hanter vrasoc'h, Andrev zo hanter binvidikoc'h evit e c'hoar, me 'm boa evet hanter nebeutoc'h egetañ ivez!

Pa vez kaoz eus niveroù,

e ranker deskiñ ar mod da lavaret :

25 zo hanter nebeutoc'h evit 50, ha 100 zo hanter vuioc'h eget 50, gwelloc'h eget *div wech nebeutoc'h na *div wech vuioc'h.

Arabat bezañ souezhet gant an implij-se eus ar ger hanter, rak klotañ a ra gant an troioù-lavar alamaneg ha saozneg :

Deux fois moins vite a ranker treiñ en alamaneg gant *halb so schnell*, hag a glot mod pe vod gant hanter gouestadikoc'h, hag evit lâret *deux fois plus petit, deux fois moins grand*, d. l. eo hanter vihanoc'h, e vez lavaret e saozneg : *half as big*.

B) E meur a yezh, evit menegiñ un niver bras-kenañ, e c'heller kemer un niver resis : e galleg ez eo

36 a glever un tamm mat (*voir 36 chandelles, il n'y a pas 36 possibilités...*), en iwerzhoneg hag e saozneg O'Flaherty ez eo 147 (= 7 + 7 x 20, seizh ha seizh-ugent), e ruseg 1600 (= 40 x 40), etc...

E brezhoneg ez eo ar stumm *warn-ugent* a laka un niver da c'hwezhañ en un taol :

Lâret 'm eus dit kant gwech warn-ugent (= 2100) tennañ da votoù-koad a-raok dont en ti !, pezh a zo kalz kreñvoc'h eget kant gwech hepken.

N'eo ket un avañs dit chom d'ober seizh kant tro warn-ugent (= 2700), ma eo tarzhet da saos eo tarzhet !

'Ouezan ket pet gwech warn-ugent on bet o welet ar medisin-se, ha ne ya ket gwelloc'h ganin ! (kreñvoc'h eget pet gwech hepken).

C) An holl ac'hanoc'h a oar e c'heller lavaret : pemp kant loenkorn = pempkantaloened korn, pe c'hoazh : en un atom soufr e kaver c'hwezek proton pe c'hwezek a brotonioù. Ur fazi a vez graet alies memes tra gant ar gerioù-niveriñ milion ha miliard, rak, e-lec'h bezañ anvioù-gwan evel kant pe mil (alese kant loen, mil den) ez int anvioù gwirion hag e ranker lakaat ur renadenn-anv el liester war o lerc'h :

Skrivañ a raer ur milion a euroioù, ha neket *ur milion euro.

Ur bloavezh-gouloù zo 9460 miliard a gilometroù, ha neket *9460 miliard kilometr.

D) Klevet e vez alies c'hoazh an niveriñ dre ugent etre 100 ha 200 :

120 = c'hwec'h-ugent

140 = seizh-ugent

160 = eizh-ugent

180 = nav-ugent

An ahel-karr a ranker sevel da zeiz ar pardon zo un ahel-karr seizh-ugent lur.

E) Niveroù petvediñ o klotañ gant 21, 31, 41 etc...

Ne vez ket lavaret *ar c'hentañ warn-ugent, mes atav an unvet (unanvet) warn-ugent, an unvet ha tregont, an unvet ha daou-ugent etc...

Implijet e veze kalz ar gerioù-petvediñ-se gant an dud a c'hoarie c'hartoù, dre ma ranked kaout, evit gounit ur barti, 21 poent en troaset, 101 pe 121 er "manille coincée", hag e veze klevet alies neuze ur c'hoarier oc'h estlammañ :

– O, 'peus ket graet an unvet ha kant c'hoazh ! (ha neket *ar c'hentañ ha kant)

— LENN AR VRO gant Ildut —

TROIAD GOUELED AR FOREST (AR FOREST-LANDERNE)

7 km, pignat-diskenn : 240 m. Parkañ e kostez **ti-gar ar Forest** (parklec'h Beg ar Groaz), diskenn betek an aod, mont a-zehou a-hed an aod, pignat gant torenn an hent-houarn da bakañ ar wenodenn-aod. 450 m goude, pignat gant ar wenodenn da bakañ **Keroualin ha straed Roc'han**. Rivinoù kastell **Goueled ar Forest, ar "Gward Laouen"**, a vo war an tu-dehoù. E penn Plasenn ar c'hastell, kemer a-gleiz **Straed Gwesklin** hag heuliañ ar wenodenn a-dreuz park an ti-kêr betek **iliz Sant-Tenenan**. A-dreñv an iliz emañ **Straed Gorrekêr** hag **Alez Koad-mez**. E penn e kavit a-zehoù, harp ouzh an hent, ar wenodenn o kas betek ar forest. En tu all d'ar c'houer ha d'ar poull-kannañ e vo da gratat ur wenodenn serzh er c'hoad hag a gaso ac'hanoc'h betek parklec'h Mez Bernard. Heuliañ ar garront grouanek en tu al d'ar c'hleuz, kemer a-zehoù e penn anezhi, hag a-zehoù ur wech ouzhpenn 270 m pelloc'h (met posupl eo ober un dro ledanoc'h ha c'hoari en em goll er c'hoad !). En em gavet er frankizenn, mont a-gleiz ha diskenn betek ar rinier. Heuliañ an hent bras da zistreiñ ha diskenn **Hent Beg ar Groaz**.

DA WELET NEPELL

Rivinoù Kastell Goueled ar Forest. Hemañ a vije bet kastell ar **Gward Laouen** hag hini **Lanselot** hervez mojenn an **Daol Grenn**. Istor ar Gward Laouen a vefe liammet kentoc'h ouzh donedigezh **Tenenan** e Goueled ar Forest e deroù ar ^{VI}vet kantved. Diwar bommoù kavet amañ-ahont e c'heller sevel ul lakadenn : galvet e vefe bet **Nenan/Ninian** (enoret ivez e **Rosko**, "Te" o vezañ an titl a enor) gant an eskob **Goulven** pe gant **kont Bro-Leon** da gas un ambrougadenn rikour betek **lennvor Brest** hag an **Elorn**, drastet gant morlaeron an norzh. Donedigezh Tenenan hag e gamaladed a zegasas frealz e spered diwallerien Goueled Ar Forest ha laouenidigezh bras er c'halonoù. Ledet e vefe bet brud kaer an darvoud gant barzhed (**Danvez Breizh**) a-hed kantvedoù betek pluennoù skrivagnerien mojenn Arzhur. Savet e oa bet ar c'hastell war roudoù ur c'hamp roman hep mar ebet. Anezhañ bet perc'hennet gant **konted Leon** ha **familh Roc'han** e oa bet dismantret e 1490 gant ar C'hallaoued, goude drouziwezh arme **Frañsez II e Sant-Albin** e 1988.

Ar forest : perc'hennet evit ul lod gant **departamant Penn-ar-Bed** ha meret en ur mod naturel. Ur restad eus ar goadeg vras a oa ledet e norzh aber an Elorn eo, e-tal da **koad Talamon** er su (**Koad Bodkenal** ha **Gorre-menez** eo ar pezhigoù a chom). Mont a reas Tenenan da annezhañ e **Lezkelenn e Plabenneg** (moudenn bet furchet gant Job an Irien hag e skipailhoù, da weladenniñ eo), nepell eus roudoù ur c'hamp roman all, e penn all ar forest neuze (d'e goulz). Da geñver difraostadegoù ar ^{XIV}vet pe ^{XV}vet kantved e voe



Dismantroù kastell Goueled ar Forest. © Gaëlle Fily

savet **Sant-Divi** a-geñver gant **Dirinonn** en tu all d'an aber (**Divi, mab Nonn e Buhez sanctez Nonn**). A-hed an hent-tizh e norzh da vourk Sant-Divi e kavit anvioù evel **"Penn ar forest", "Pennc'hoad"**...

ANVIOÙ-LEC'H TRO-DRO

- **Guerrus-laouen** : anv faltazius roet da gastell ar **C'hoad-Ruz (Guerrus)** gant familh ar saverien (1870). Soñjal a raer e oa ur c'hoari gerioù evit dreveziñ anv kastell ar Gward Laouen...

- **Koad Mez** : kavet e stumm **Mezkoad** e Landerne e meur a lec'h all. Unan eus talvoudegezhioù pennañ ar c'hoadeier a oa kas ar moc'h da vesa.

- A-zivout **Plabenneg (Plebs Abennoc)** : Kentoc'h eget anv ur sant ne gaver roud ebet anezhañ e soñjan er c'heltieg *"ab-onna"* evit envel ar stêrioù (kmg : *afon*, bzhg : *aven*, gouezeleg : *abann*). Meur a stêr a dremen dre ar c'hontre : **Aber Ac'h, Aber Benead, Benouik** (Bourc'h-wenn). Soñjal ivez e **Pontavenneg** e Lokournan. An holl "ploueoù" n'int ket staget d'un anv sant : **Plougastell, Plounevez, Plomeur**...

- Hag a-zivout **Benouik** : poseve e vefe bet anv kentañ an aber Benead (ben : genoù un aber, Binig, Benanstêr, Benodet, Benaven...). Evidon eo an anv tostañ eus hini an haroz **Ban Benoik (Ban de Benoic)**, anezhañ tad Lanselot er romantoù arturian. Bann a dalvez kement ha "tachenn a veli" un nobl pe ur barner (bannlev : takad betek ul lev tro dro d'ur c'hreiz, d'ur gêr ; bangor, tachenn greiz ur meuriad). Hag un degouezh e vefe kavout er vojenn an daou anv, Ban Benoik ha Lanselot, tad ha mab, liammet gant tiriad Tenenan en dro da Lezkelenn ha Goueled ar Forest ?

DANEVELL

PLANEDENN YANN (1/2)

gant Stefano Benni (Brezhoneg diwar an italianeg gant X. K.)

Ur wech e oa en un ostaleri karter un den na oa bet gwelet morse 'barzh an tele. E holl vignoned ha kement den a anavez e oa bet gwelet ; eñ ne oa ket bet.

Pêr ha Linda¹ a oa bet o c'hlaourin hag o kavout anvioù an eil hag egile, war-eeun, e "Ne c'houzanvan ket ac'hanout mui", un abadenn evit ar priedoù savet etrezo.

Lanig a oa bet pilet gant ur scooter hag en doa troet du-mañ du-hont, aet divemor. Kaset e oa bet d'ar gêr gant "Tec'h kuit pe 'tapin ac'hanout", un abadenn evit kavout ar re bet kollet, war-eeun.

Chanig he doa kemeret perzh en un abadenn "strip-tease" evit ar merc'hed a chom war-dro an ti.

Fulub a oa dilammet war un dachenn velldroad ha bet sammet gant ar polis dirak daoulagad seizh milion a arvestourien.

Da "Prosez dirak an holl" e oa aet Kaourintinieg ha Loeiza abalamour m'en doa debret kash Kaourintinieg kokatriz Loeiza ; ha sach-blev etrezo ken a oa bet fardet ur video diwarno.

Kemeret en doa perzh Youenn e "Crazy Record" en ur stlejañ ur c'harr war kant metr war-bouez ur gordenn stag ouzh e gelloù.

Jakez a oa bet test ouzh ul laeradenn, lazhet un den enni, ha gwelet e benn e teir abadenn kelaouiñ pe vuioch'h.

Holl bratikoù an ostaleri a oa bet gwelet 'barzh an tele, ur wech d'an nebeutañ. Nemet Yann.

Joz, mestr an ostaleri : div wech zoken. An taol en doa gwerzhed ur bilhed "Skrabad ha gounid ur milion", ha pa oa bet en abadenn "Doganed" gant e wreg Katell ha Maze, ar boulañjer.

Reun, mevel an ostaleri, a oa bet o c'hoari e "show" ur saouzaner brudet, en doa lakaet anezhañ d'ober ar c'hangourou, ar yar vezvez ha da vale war-c'horre glaou bev.

Madalen, plac'h ar c'hef, he doa graet tro ker, dizolo he bronnoù daou liv, pa oa pignet ar skipailh melldroad el live rannvroel, ha gwelet e oa bet e talbenn abadenn gelaouiñ ar chadenn gentañ. Fulup, paotr al lizhiri, kenseurt da Yann, en doa kemeret perzh e "Hobby"

gant e zastumadenn kistin distumm.

Ar C'Horrig bihan en doa kanet er strollad Mouezigoù aour "Ur vu... Vu... Vuoc'h eveldon".

Naig vihan he doa graet un dezrevell eus Madonna e-barzh "Doueed ha douezed".

Rozenn, ur plac'h yaouank, a sikoure he mestr e "Telekarter", o werzhañ tapisoù war-eeun.

Taro, bet bokser, en doa graet war-dro servij an urzh ar Festivalbar ha filmet e oa bet da vat o yenañ yaouankiz "fan" ouzh ur c'haner brudet.

Gaidig, p'edo plac'h yaouank d'ur c'hoarier melldroad, a oa bet gwelet teir gwech, a-dreñv, war leurenn "Prosez al Lun".

An holl ! Yann : blev !

An I. Born, gant ur bellgomzadenn war-eeun da "Disul, te an hini 'vo", he doa divinet anv an ostiz kevrinus, kontet un tamm farserez gant Chanig, an abadennerez vrudet, ha gounezet ur veaj da Zanzibar : koulz hag en em ziskouez en tele pe welloc'h. Yann-Vari, he fried, pa oa bet goulennataet e-kreiz abadenn kelaouiñ ur chadenn gorn-bro, en doa lavaret hag an arabed² e oa dezho chom e-lec'h ma oant.

Louarn, medisin-loened, a oa bet pedet d'ober e ali en tele diwar-bouez talvoudegezh ar vantellig evit ar chas, ha peget ennañ gant ur c'hocker diskouezet dilhad mod-nevez.

Moereb Mireille Graulhet, genidik a v-Milhou, p' he-doa tapet he c'hant bloaz, a oa bet gouestlet dezhi un hir a abadenn 'barzh "Breizh Senior" en he rannyezh istitlet e brezhoneg.

Berc'hed vihan, kentañ nevez c'hanet e kêr e 1993, he doa lavaret demat d'an holl eus he c'horerez.

Gwionig a oa bet diskouezet evel skouer muzelloù faoutet ar vugale e "Medisinerzh evit pep hini".

Moal, an touzer, lakaet e anv gantañ evit respont da goulennoù war istor karantez ar V.I.P., en doa gounezet dek milion evit prenañ dienn da rouzañ e groc'henn.

Pêr, ar c'higer tev, a oa unan eus ar c'hwec'h-kant sac'h toaz o redek war o c'hezeg-houarn e bruderezh Snelly, a laka ar boued da zousaat.



Moign, gloazet en ur c'hren-douar, a oa bet goulennataet, stelennet gantañ e zivrec'h torret.

Ne oa ken nemet Yann na oa ket bet gwelet e liv 'barzh an tele, ken na selle an holl outañ a-dreuz. Pa zeue d'an ostaleri e rae van ar pratikoù na welent ket anezhañ. Diseven e oa ar mevel en e geñver. Hag ar merc'hed, gwasoc'h c'hoazh ! Ne oa ket, zoken, evit o fediñ d'evañ ur banne kafe. Un abardaevezh edo azezet Yann en e gorn, e-unanig, e-doug ma selle an holl ouzh ur pennad eus "Planedenn U.F.O". Eno, e konte Follig, paotr al laezh, penaos e oa en em gavet sko en ur treoablour ha bet paraet gantañ e rusterioù dre-berzh ur c'hwitelladenn ultrasonek. An holl a eve o banneoù hag a zisplege o mennozhioù, war-bouez Yann. Ken teñval e oa e benn ma drec'has Madalen, plac'h ar c'hef, war he displijadur hag a doullas kaoz gantañ :

— *C'hwil a wel, ur paotr mat ez oc'h, Yann, ul labourer, biskoazh n'eo bet direnket den ganeoc'h. Koulskoude ez eus ennoc'h un dra bennak na ya ket plaen. Abaoe ugent vloaz zo e anavezan ac'hanoc'h ha n'oc'h ket bet gwelet un hanter-vunutenn paneveken en tele. Bezañ techet da chom a-gostez evel m'edoc'h a lakaa unan da grediñ ho peus un dra bennak da guzhañ. Al lorc'h, pe, gwasoc'h c'hoazh, piv oar, ur gwall si na fell ket deoc'h diskouez. Setu, da'm soñj, e chomfoc'h atav hoc'h-unan-penn ma ne ziskoulmit ket ar gudenn-se.*

— *Trugarez deoc'h, maouez vat, a respontas Yann, ken anaoudek ma teuas an dour en e zaoulagad. Prometiñ a ran deoc'h e rin va seizh gwellañ ha...*

— *Sell 'ta piv ! Pêrig, ar marc'hadour kelaouennoù !, a youc'has Madalen, hep selaou egile zoken.*

Difoupet Pêrig war ar skramm en abadenn "Deus en-dro ganin-me", o ouelañ en ur c'houlenn pardon digant e wreg yaouank hag o touiñ na lenne ket mui kazetennoù "porno".

— *Gouelañ a laka unan d'ober, eme Madalen, en ur dorchañ he daoulagad.*

Distreiñ a reas Yann d'ar gêr emskiantoc'h eus e gudenn ha leun a esperañs. Ret e oa dezhañ en em ziskouez en tele. Un dra divoaz, souezhus, dedennus a ranke kavout. Kaer en doa furchal, siwazh, e hañvale e vuhez bezañ boutin, enoeüs, dizudikrenn evit an tele. A-greis m'edo o prederiañ e klevas a-bell c'hwitelladenn an tren, ma laouenas e dremm : an drask ! Ur mail e oa Yann da zrevezañ kan an drask, un dra bet desket dezhañ gant e dad chaseour. Raktal e skrivas da "Gwad war al leurenn", ul leurenn evit amatourien. Ur sizhunvezh war-lerc'h — pebezh aozadur peurvat ha nag a from ! — e tegouezhas ul lizher d'e c'hervel evit an dibab. Birviñ a rae e galon met divizout a reas chom hep rannañ grik da zen. Gant e genseurt Pêr-Jakez e c'houlennas ma asantfe hemañ labourat en e

blas e-pad un devezh.

— *Tennañ a ri tan !, a respontas egile, hegaset. Petra bennak ken pouezus-se az peus d'ober 'ta ?*

— *D'ar gêr-benn ez an, galvet on gant an tele evit un dibab emstriverien, a daolas Yann .*

— *Mar kar te bez' lavaret diouzhtu !, a hopas Pêr-Jakez. E-pad tri devezh e kemerin da blas m'az peus c'hoant.*

Un hanter- eur goude ez eas Yann d'an ostaleri hag e komprenas e oa bet klevet ar c'heloù. En ur mod all e selle pep hini outañ. Ar mevel e saludas, seven-meurbet. Betek plac'h ar c'hef a lavaras dezhañ a vouez izel :

— *Va startañ gourc'hemennoù... Salutit Bastian Vraz eus va ferzh ha goulennit digantañ ha bez' en deus soñj eus Madalen, bet war ar renk evit kanañ "Fromoù".*

Evel en un huñvre ez eas d'ar gêr-benn. Beuzet en e vennozhioù displamm hag en e spi, ne daolas kont e netra : tren, engroez, ti-houarn. Pa c'houlennas bezañ kaset betek TFZERO gant paotr an taksi e teuas hemañ chichant ha leizh a gaoz dezhañ ; digeriñ an nor a reas, zoken, pa erruas e bratik dirak sez an tele vroadel.

Da heul en niverenn 1004.

Notennoù digant an troer :
¹Anvioù tud pe zivoutin brezhonek zo bet lakaet, evel-just, en droidigezh e-lec'h ar re italianek.
²"Tud an Albani" er skrid orin, dister o brud en Itali.

SINEMA

gant Yann-Glaod Ruied



TEHACHAPI

Ur film gall sevenet gant : JR (2024)

Gant : JR ha lod a brizonidi Tehachapi (1e32)

Goude boud gwelet **Borgo**, ur film gall a-zivoud ur prizon e Korsika, setu un teulfilm ar wezh-mañ, a-zivoud ur prizon amerikan : Tehachapi, e-kostez Los Angeles. Daw eo gouied e kaver er Stadoù unanet 20 % a brizonidi ar bed pa ne gonter nemed 4,2 % a Amerikaned er boblañs olleg. Ema Tehachapi ur prizon ennañ prizonidi ag ar re d'errañ. Ha setu dres ur prizon a-sort-se a zo bet choazet gant JR evid kas ur ragtres arzel da benn. Ema JR un arzour gall hag

a ra fotoioù gant tud ordinel evid sevel skeudenoù braz-spontuz e lec'hioù dic'hortoz, e Pariz hag er bed. Lakaet en doa piramidenn ar Louvr da zisparisañ ha da grediñ e oa un toull braz e mur-dal an opera Garnier, pe dour e redeg dindan an tour Eiffel.

Amañ enta en deus choazet ur lec'h difer, na oa ket dizañjer. Mez kredabl en deus tapet an arzour trawalc'h a fiziañs en e arz evid gouied pegen efeduz e c'hell ar benveg-se boud evid treuzfurmiñ

an eneoù. Arzterapi ag ar choaz ! Diskoueziñ a ra ar film an avañtur dibar-se, ag ar penn kentañ d'ar fin (ma eh eus unan !).

Pa lâren tuchant ema Tehachapi unan a doullou-bac'h startañ ar Stadoù, e rankan lâred eh eus ennañ kaouedelloù da sparlañ enne ar pennoù aheurtañ mizioù- pe bloazadoù-pad. Tre evel loened. N'eus darempred deread ebed etre ar brizonidi hag ar warded, ataw tenn an traoù etreze. Ur vinikevredigezh amerikan zo bet savet er prizon gant ar brizonidi o-hunan, gant klañioù ha gañgoù, gwir skeudenn ag ar pezh a zo er-maez. Latinôed eneb da Indianed, re zu eneb d'ar re wenn... Ha gwad a vez strewet liez. Lod zo aze evid o buhez-pad, a-gaoz d'un torfed graet pa oant minored c'hoazh. Kondaonet lod da ouzhpenn kant vloaz a brizon, heb chañs ebed da weled o setañsoù boud berraet. Da lâred eo un toull dizesperuz, tro-dro dezhañ murioù uhel

ha miradorioù enne gwarded aketuz noz-deiz.

Gellet en doa JR, a-drugarez d'e vrud vad kredabl, tapoud an droed da voned er savadur-se, ha diarm-kàer, evel ma vez gwisket ataw : lunedoù du war e fri hag un tok skañv war e benn. Saludiñ unan ha unan an oll re o doa asantet kemer perzh en e daol-añsi. Esplegadennoù berr ha resiz e saozneg. Ha krog e-barzh. Fotoioù peb unan da gomañs, JR war ur skeul. Portredoù gwenn ha du. Savit ho penn ! Serrit ho taoulagad ! Digorit-hè ! Grait griñsoù ! Ha gant ar portredoù-se tennet fotoioù braz-braz, kempennet war rolloù paper hir-mat da vout peget e kourd ar prizon. Hag an oll é labourad evid lakaad peg war ar simant, pegañ ar paper ha lakaad ur gwiskad peg c'hoazh war lein ar paper peget ur wezh, tre evel ma vez graet gant pegerion skritelloù ar bed a-bezh. Obliget boud uhel evid kompren ar foto. Ar pezh a vez graet a-drugarez

d'un dron. Ha gwelet e vez an oll bortredoù-se é selled d'ar lein, tud e foñs o zoull é saludiñ pe é c'halviñ ar re a zo er-maez, er lein, dijabl... Ur foto hag a ray tro ar bed, hag a lâro d'ar bed eh eus tud er lec'h-se, dalc'het o buhezioù ennañ. Ur montaj zo bet graet ouzhpenn : pa bouezer war bortred unan bennag, e kont hennañ e istoer...

Ur film fromuz-braz eo, hag a ziskouez pegen kreñv e c'hell ar groudigezh boud evid roiñ spi ha c'hoant da sevel endro, d'en em zistag a-zoc'h an torfedoù tremenet, da grogiñ er vuhez gant ur sell nevez. Berr eo da'm soñj barnadenn ar Figaro, dizmegañsuz evid tro gâer JR er prizon-se, gant tud kondaonet reizh, mez tud memes tra, daet dezhe, da lod d'an nebeutañ, ur sell nevez war o buhezioù, war ar vuhez : "Tout le monde il est beau, tout le monde il est gentil". Ya, kredabl, mez daw eo saludiñ ar re a c'hell en em dennañ ag ar puñs ma o doa en em daolet ennañ ur wezh.

KRONIK AN ERMINIG

gant Thierry Chatel

Pegen dedennus e vezo ganin danevellañ dre ma fluenn 'pezh 'vez kontet din bep sizhun gant an Dimezell Erminig 'zo o chom e Koad-an-Noz. Loenig-ardamez Breizh he deus dastumet ur bern emvuhezskridoù-loened o foetañ hor bro... E korf ar pennadoù-se e vo kinniget deoc'h, lenner-ez ker, teir gwech, choaz unan eus an teir elfenn (merket gant ur steredennig) bet meneget e deskivadur al loen. Kavet e vo ganeoc'h ar respontoù er fin. Setu a-is eta komzoù ul loenig a anavezit mat...

Biken n'o deus bevet izili ma spesad e Bro-Iwerzhon na war Enez-Gorsika. Paotaat a reomp e pep lec'h e "Bro ho tadoù" nemet war Enez-Eusa. E Breizh e kejan a-wechoù gant ur geniterv deuet eus Bro-Akitania. Soudet eo he malvennoù tra ma'z eus tu da'm daoulagad bihan gwelet un tammig etre ma malvennoù damzigor..

Plijus e kavan bezañ digenvez. Met bep nevez-hañv e teu ur par bennaket da gediañ ganin, dre garidennoù.... Pevar sizhun war-lerc'h e vez ganet ganin 6 hini bihan, moumounet

ganin en ur gambr pallennet a zelioù.

Nerzhus evel re un arzh eo ma favioù a-raok. Gant ma skilfoù kreñv e c'hallan distrujañ, sevel, pe duriañ ! Peurvuiañ e ran (1) *teir / *pemzek / *daou-ugent turiadenn...

Ar c'hwisha ha skiant an touch a implijan kalz rak noziñ a ra atav em metoù naturel !

Larved koleptered ha buzhug a zebran. Evel ar gwiñver e ran pourvezioù : pas kraoñ... mirout a ran larved bev en ur "vouedeg" dindan-douar.

Daoust din da vezañ bihannik (war-dro (2) *100 g / *200 g / *250 g) e teuan a-benn da duriañ riboulioù dezho 200 metrad hirder, 250 metrad zoken. Bemdez e c'hallan hiraat ur c'haridenn war un hed a ugent / metrad !

E-pad an hañv-mañ em eus labouret kalz e parkoù Breizh, er c'hoadoù, er pradeier hag el liorzhoù ! Gleb e veze alies an douar !

Breizhiz a anavez mat ac'hanon. Hervezo, ar penn a ro ul labour re zañjerus pe re boanius d'e vevel a gas



Goz Europa / Talpa europaea © Christoph Moning

anezhañ da'm rouantelezh !!! Met tu zo "d'ober ar c'hoz" ! (= faire le gros dos) pa vez re ziaes hor stad deomp-ni !

Pa vez unan bennaket o kousket mat e lârer eo "kousket evel ur c'hoz en he zoull" ! O komz eus ur c'hi kuilh e lârer eo lart evel don ! Diouzh bugale n'int ket gouest da zeskiñ o c'hentelioù e lârer "e teuont eus bro ar gozed !" 'pezh a zo dismegañsus em c'heñver...

Lazhet e vez alies lod eus loened ma spesad gant ar gaerell-Europa (Mustela nivalis), gant kizhier, chas, lern, naered, pe evned-preizh ! Evel-just ! Pa vezan kuzhet en unan eus ma garidennoù, (3) *hanterkant cm / *ur metr / *dek metr er c'hondon, e vezan e

savete. Met arabat din chom pell dindan ma zuriadennoù ! Ne vezan ket diwallet mat a-ze ! Start e vez ma buhez pa vez re sec'h an douar, pa vez skorn. Spontus e vez ivez pa vez dour-beuz !

Gwechall, e Breizh, e veze graet togoù gant krec'hin ma hendadoù. D'ober ur vantell e veze dastumet war-dro 400 kroc'henn d'an nebeutañ !

Hemolc'het e vezan gant div blac'h e Bro-Dreger, mendro enno... Stignet e vez antelloù bihan gant ar "preizherezed"-se, Lena Labad eus an embregerezh "Ah les Go" eus Tonkedeg hag ar venajerez Mélanie Noguès eus Plouha...

En hañv, meur a Gatell-liorzherez he deus tapet ma douar skañv ha "tamouezet"

da blantañ fleur e podoù... Ne vern... N'eus ket ul loen skragn ac'hanon !

Deuet oc'h a-benn da lenn ma zestennig ? Diarvar eo n'oc'h ket "ken berrwel hag ur c'hoz !"

Diwallit ma tegouezh ganeoc'h alies "evañ evel un toull goz !"

Ezhomm ho peus, tudoù, ac'hanon, daoust din bezañ ul loenig dister, rak "Mar klevfe ar sourd ha ma gwelfe ar c'hoz / Ne badfe den e-barzh ar vro !" "Goz Europa" eo ma anv brezhonek. "Talpa europaea" hervez ar skiantourien !

Responoù : (1) Pemzek turiadenn... (2) War-dro 100 g. (3) Hanter-kant cm er c'hondon, (bete) ugent pe tregont evit ar gozed (kourajusañ a-wechoù) !

SONEREZH

gant Gaetan Boulig

AR ROCK ER STADOÙ-UNANET : AR SONEREZH HAG AR BREZIDANTED (1/4)

Ne raio nemet kreskiñ er c'heleier an trouz a denn d'an dilennadegoù er Stadoù-Unanet a-feur ma tostaimp ouzh miz Du. A-raok kuitaat ar Stadoù-Unanet, ha ma taolfemp ur sell war al liamm a zo etre ar sonerezh hag an dilennadegoù e bro an eontr Sam.

Ma soñj deoc'h e tenn ar c'hampagn politikel evit bezañ prezidant ar Stadoù-Unanet d'ur sirk eo ret deoc'h goût e oa dija ar memes tra 150 bloaz zo. Al liamm etre ar sonerezh hag ar politikerezh zo ken kozh hag ar Stadoù-Unanet.

Ar c'hampagnoù kentañ a oa dibunadegoù gant hucherien, loened ouesk, fañfarioù, charabañioù ha sonerezh evel-just, ar skridoù-sonerezh o vezañ roet da goulz an dibunadeg. Peurliesañ e oa tonioù kozh a oa bet cheñchet ar pozioù dezho evit meuliñ an den war ar renk. E 1840 e krog ar sonerezh da ziskouez he zalvoudegezh. Dindan ren ar prezidant Jackson (1829-1837) eo kresket an niver a

vouezherien rak n'eus ket ezhomm da vezañ perc'henn douaroù evit votiñ ken. Hogen ar voterien nevez-se n'int ket ken desket hag an upper class. *Tippecanoe and Tyler Too* eo an ton kentañ sellet outañ evel ur beñveg kampagn. Implijet eo gant William Henry Harrison, lesanvet Tippecanoe, ul lesanv gounezet da goulz an emgann en doa kaset a-enep an native-amerikaned e 1811. Diazezet eo ar ganaouenn war ur rimadell mil anavezet *Three little pigs*, ar pezh a aesao he emled. Ken poblek e teu da vezañ ma skribo ar c'hazetennoù eo ar ganaouenn he deus digoret dorioù an Ti Gwenn da Harrison.

Adkemer un aer kozh gant pozioù nevez zo atav diouzh ar c'hiz. E 2016 e kinnig Donald Trump d'ar vro teir flac'h yaouank gwisket gant livioù ar Stars and Stripes, The USA Freedom Kids o kanañ *Freedom's call*, un ton propaganda eus ar Brezel-bed Kentañ treuzfurmet e bozioù evit an degouezh. Dre ar rouedadoù sokial e ra berzh ar merc'hed met

o zad, a oa o manager, a rank dougen klemm un nebeud miziadoù goude rak an arc'hant prometet d'ar strollad gant Donald Trump ne oa ket bet roet. E 2020 e kane The USA Freedom Kids ar memes kanaouenn c'hoazh gant pozioù nevez, evit Joe Biden ar wech-se.

Implij versionoù orin ar c'hanaouennoù

A-hervez e vefe Franklin Delano Roosevelt an den kentañ war ar renk oc'h implijout un ton dija enrollet hep e cheñch evit harpañ e gampagn e 1932. Skignañ a reas an titl *Happy days are here again* da goulz ar c'hendivizad demokrat hag e teuas da vezañ un himn evit ar strollad da goulz an dilennadegoù, o tiskouez e c'hoant da skubañ enkadenn ekonomikel 1929. D'ar c'houlz-se ne oa ket c'hoazh ar c'hanaouennoù stag ouzh un arzour, ne voe den ebet o klemm eta hag ar ganaouenn a zeuas ivez da vezañ himn dibenn ar *prohibition* e 1933. E 1948 e implij Henry Wallace, bet besprezidant Roosevelt,



Ur skritell a-enep Trump er "Woman's March" e Londrez e miz Genver 2017. © Sam

We shall overcome (Trec'h e vimp) evit e gampagn. A-raok bezañ brudet gant Pete Seeger evit e stourm ouzh ar gapitalisted ha gant Joan Baez da goulz stourm ar gwirioù sivil e oa ar ganaouenn ur "*protest song*" endeo. Ur gospel e oa da gentañ met adalek 1945 eo kan bale micherouezed ar butun oc'h ober harz-labour. Ne zougas ket chañs ar ganaouenn da Wallace a voe faezhet gant 2,54 % eus ar mouezhioù nemetken met ur pouez istorel gwirion zo gant ar ganaouenn a voe implijet ivez gant Lindon Johnson e 1965 evit

souten e *Voting Rights Act*, ar gwir da votiñ evit ar re zu. Ha zoken ma lavare Malcom X : "*We shall not overcome with songs*" e kendalc'h ar ganaouenn da vezañ kanet e meur a vanifestadeg er bed a-bezh.

Evit an istor bihan, n'eo ket dieub c'hoazh gwirioù *We shall overcome* pe *This land is your land*, kanaouenn vrudet Woodie Guthrie, kanaouenn sokialour hag enep-faskour. Hervez Nora Guthrie, merc'h Woodie eo un doare da virout ma vefe implijet gant ar c'h/Ku Klux Klan pe an National Rifle Association.

E GALLAOUEG

SONJAEZONS

FREDERIC MISTRAL (2/2)

od Patrik Deriano

Mirèio, ça q'êt ûne longe poieteriy sus ûne istoère d'amour qi se finit sus le défuntement de la prominze, de cai qi ramene un petit a Roméo e Juliette, maez en dépingllant¹ la Provence du temp-la. De cai qi feraet chaorire astoure, maez q'avaet core la voge n'y pas 100 ans. Set ans q'il a falhu a Mistral pour composer son coup de maettr. Maez le banir ét d'aotr jeu. Come pour tout ce q'êt écrivaije en France, faot passer par Pariz. En 1855, un Provençao montae a Pariz, receit ûne bourse pour rasserrer lez poieteriys du peupl den le Meidi de la France. Il s'en vient don vair Mistral qi li débergoêze² lez sienes a lu. Sti-ci, Adolfe Dumas, en ét essaourae³. En 1858, Mistral l'ertreue sus Pariz. Dumas passe un articl den dez journaos e envaye Mistral vair Lamartine. Lour periant⁴ n'n ét net enhaetae⁵. *Mirèio* ét bani en fevrier 1859. Ao mais d'avrilh, Lamartine, qe Mistral ervait a

temp-la, passe un articl sus Mistral den se reveure e qi l'aloze qe l'alozer⁶.

Drôle de ça, ét en Provence q'en ét le meins chaod pour *Mirèio*. Un grimacier de Marseille ecrivit memme : - ét tout coume adma⁷ q'un coup de maettr de memme seije ecrivit den le langaije de noz jens d'atache ! Come partout en France, lez haots-luards⁸ regardaent lez petits langaijes de haot.

Faot savair qe le petit nom *Mirèio*, y avaeet memme pas de li a temp-la ! 'ét Mistral qi l'a faet passer come ûne tournaezon de Marie en provençao. Depeis il a faet france⁹, od son atraetement¹⁰ en Mireille. Le petit nom-la ét dounae pour la premiere fais a un bateyme en 1861 e 'l a falhu Mistral batalher pour cojer¹¹ le recteur de batizer la poupone od le petit nom-la. 'ét dire le poèz d'ûne euvr qi va étr tourney den pus de 50 langaijes e ercopyey en bralhe. Mireille va devenir memme de l'ajhetis¹² de

toutes sortes : de l'huile d'olive, de la cochonalhe, du fourmaije, du sucr, de la peinture, diqa ûne pplanète qi va s'apeler de memme. Gounod n'en fit memme ûne opera.

Passom sus le Mistral bon courouz de cotilhons pour ermerqer q'il se maryit en 1875, a 45 ans, od ûne Dijonaeze 25 ans de pusjeune qe lu. Ella restera san jiet¹³, maez d'après qe le poiète araeet laessae un broussier¹⁴ aoterment. Teurjous ét-ti q'il ira maezei demeurer den ûne nouvelle ôtèo a Malhane eyou q'il va étr a son amaen pour ercontinuer son euvr.

En 1891, il monte un journal tout en provençao, *l'Aioli*, q'êt bani treiz fais du mais. Diq'en 1899 q'il va tenir, le journal-la, e biao qe d'étr vedionouz¹⁵, Mistral poua pas le mener pus lein. Ben vrai, ça taet lu qi menaet toute l'ouvraiye bentôt e ça pouit pas durer de memme.

Den la poieteriy, passae *Mirèio*, Mistral banissit etou

Calendau en 1867 e *Lis Isclos d'Or* en 1876. Son ouvraiye escarabl aoterment, ça fut *Lou Tresor dou Felibrige*, un maçacr motier du provençao od 75000 mots deden, bani a paisseys entre 1880 e 1886. Mistral a core bani du ppleurement¹⁶ e sa biografy, *Moun Espelido - Memori e Raconte*, aossi ben. D'après q'êt le livr-la qe faot leire premier pour sti-la qi veut mieuz aconaeatr la beyte de hay¹⁷ q'il taet. Pour dire, il alit memme diqa monter en 1896 un muzé a Arles eyou q'en pouaet erterouer tous lez ourcieùs qi ramenaent a la qhulture occitane. Mistral taet aossi net dounant. Toute l'arjient qi li ervenaet de sez écririys servaet ren q'a eïder a l'assor de l'occitan e ben dez fais il a eïdae a yeuz qi taent den la hère¹⁸.


'ét 1904 q'êt sa grande aney. A caoze de *Mirèio*, le priz Nobel d'écrivaije li z-ét erbalhae de maitiae pâmeins od José Echegarai, un Espagnol. Il ét tout soul

a a vair erceù le priz-la den un petit langaije diqa 1978, q'un Ameriqhaen l'a zeù a son tourn pour avoir ecrivit en yiddish. Ça qi fut conseqent a temp-la pour l'occitan qi fut minz ao haot-bout¹⁹ du coup-la tout coume.

Cant il defuntit diz ans après ao mais de mars 1914, il ut dreit a dez grands ouneurs a son enterrement. Qhi q'a faet q'il fut oubli par après ? Sembl q'il a tenant véqhi come un adlaizis e q'il a pas mizerae jamaez. Den le coup, il a pas veù le tourn qe la societae pernaet. E peis, il a portae le provençao si haot q'il taent pas aoqhun pour prendr après lu. V'la qhi q'il faet qe, pour ûne part teurjous, le provençao ou ben l'occitan, il ont devariae²⁰ depeis.

¹taolenniñ ; ²displeg ; ³entanet ; ⁴ostiz ; ⁵plijet ; ⁶meulet ; ⁷kerse eo ; ⁸fougaserion ; ⁹graet berzh ; ¹⁰boazadur ; ¹¹rediañ ; ¹²aozadoù kenwerzhel ; ¹³dishêr ; ¹⁴bastard ; ¹⁵oberiant ; ¹⁶dramaouriezh ; ¹⁷den oberiant ; ¹⁸dienez ; ¹⁹enoret ; ²⁰aet war ziskar

GANT FRILOUZ



C'HOARIOÙ

GERIOÙ-KROAZ

gant J.-F. Peden – K790 (Aes)

	I	II	III	IV	V	VI	VII	VIII	IX
1									
2						■			
3									
4				■					■
5	■								
6									■
7				■		■			
8					■				
9			■						■
10							■		
11									

A-BLAEN :

- 1. Ober kriadenn ar yar. – 2. Lakaat, berroc'h. Te a raio (vd*). – 3. Perzh un dra a zo e fedus. – 4. Evit lavarout "e oa met n'eo ket ken" (vd*). E teuas (vd*). – 5. Naoniet pe dost. – 6. Kolier ar c'hi. – 7. Rentañ e hini da Zoue a zo mervel. Mont a raen (vd*). – 8. Rakger evit "a-raok". Bevaoad devertet eus an amoniak. – 9. Arsenik ar c'himiour. Stage e vag ouzh foñs an dour (vd*). – 10. Astat ar c'himiour. Dibenn verboù zo. Rannig nac'h. – 11. Marc'h-houarn ar vugale vihan.

A-SONN :

- I. Dont da vezañ gleb. – II. Ober, doare divizout amzer-vremañ (vd*). Naetae (vd*). – III. Ur gaz graet gantañ el lampoù. – IV. Kalz buanoc'h eget ar vaot ez a. Daou du Landaol. Etre div ha peder. – V. Nag a-gleiz nag a-zehou (tri ger 1/2/4). Gouzout a ra (vd*). – VI. Traoñ, traoñienn. Stêr Piza ha Firenze (Italia). – VII. Ur barr-reverzhi goude ur c'hren-dour e strad ar mor. – VIII. Menez "Kerne-Leon". Dont a rae (an dour) er-maez eus an dour (vd*). – IX. Ur seurt boest rikl-dirikl en ur pezh arrebeuri. Dibennger anv ur yezh.

*vd = verb displeget.

SKINWEL

FRANCE 3 BREIZH

Abadenn ebet d'ar Sul 1^{añ} a viz Gwengolo

BREZHOWEB

4 MUNUD E BREIZH – C'hoarioù Breizh... e-skeud ar C'hoarioù olimpek

Kalz a c'hoarioù a veze graet gant ar Vretoned gwechall. Koazhet int, met klasket e vez adsevel anezhe memes tra... Betek dont da vezañ sportoù olimpek ?

PODKAST

HEKLEV PODKAST

E PLEG MA SKOUARN – Lizig hag ar garantez

Lizig zo 12 vloaz hag o paouez en em gavout er bempvet klas emañ. He c'hamaraded klas a zo deuet da vezañ sot gant an istorioù karantez. Diaes eo dezhi kompren perak ha pa bok evit ar wech kentañ d'ur paotr ne sant netra... Gouestaat e kresk enni santimantoù evit he mignonez wellañ, Riwana, met ne oar ket ma'z eo posupl karout merc'hed... Gant sikour ur gasourez e kompreno e c'hell karout n'eus forzh piv, ne vern ar jener.

Un istor ijinet ha c'hoariet gant Aziliz Peaudecerf

Ur podkast da selaou e : <https://heklevpodkast.bzh/Lizig-hag-ar-garantez.html?lang=br>

A LINENN DA LINENN

Loc'hit eus BRAE
Savit ur ger all da bep linenn,
o cheñch ul lizherenn hepken.
Hag echuit gant GLUD

B	R	A	E
G	L	U	D

Diskoulmoù

Q	N	T	G
O	V	T	G
O	V	H	G
E	V	H	G
E	V	R	G

Q	3	0	0	H	H	I	3	L
3	N	N	Y	I	L	Y		
3	I	H	0	3	S	Y		
N	I	W	Y	I	N	3	X	
N	3	Y	I	3	N	3		
3	N	N	3	T	T	0	R	
I	3	N	0	8	T	0		
3	S	Y	3	I	3	R		
W	3	I	S	N	0	3	3	
I	W		I	Y	X	Y	Y	
I	Y	N	N	3	9	Y	R	

Noms de lieux bretons de Haute-Bretagne gant Jean-Yves Le Moing



E Breizh-Uhel e oa an darn vrasañ eus annezlec'hioù rouaned ha duded Breizh (evel Kastell Naoned). Enluc'het o deus ar Vretoned an anvioù-lec'h zoken e kêrioù evel Naoned pe Roazhon, ar pezh a destenn gwriziennoù breizhad an tiriadoù-se. Ur meneger ennañ 1000 anv-lec'h hag anv-den zo en oberenn-se, kement ha 32 gartenn lodenniñ.

A orin eus Bro-Bondi eo Jean-Yves Le Moing, war harzoù Breizh-Uhel. Ijinour ha "docteur ès lettres" eo e skol-veur Roazhon 2. Kevrediñ a ra e zedenn micherel evit an urzhiaerezh d'e hini evit sevenadur Breizh.

>> Embannet gant Yoran Embanner - 24 €- 496 p.

BRUDAÑ HA SKIGNAÑ ZO O KLASK

Emañ Brudañ ha skignañ o klask ur gazetennerez pe ur c'hazetenner (35e/sizhun).

Lec'h labour : Pondi (56) ha Gwened (56)

Doare : 35e/sizhun - CDI (kevrat vicherel ma vo ezhomm)

Post-labour da bourveziñ : ar buanañ ar gwellañ

Deskrivadur ar post-labour : Bezañ perzh en abadenn "Keleier ar Vro" savet gant kazetennerien-ezed Brudañ ha Skignañ, skignet gant Radio Bro Gwened, Radio Kreizh Breizh, Arvorig FM,

Radio Kerne ha Radio Naoned. Embann an abadenn geleier, sevel ha frammañ pennadoù-kaoz. Labourat abred diouzh ar mintin hag e-kerzh an dibenn-sizhun. Skoazellet e vo an den pa grego gant al labour.

Stumm den emaomp o klask :

- Brezhoneg komzet ha skrivet (live C1)

- Bezañ en e/hec'h aez gant un urzhiataer (meziantoù Office, Audacity, Reaper...)

- Skiant-prenet e bed ar c'hazetenniñ a vo deuet mat met deraouidi a vo

degemeret ivez - Bezañ emren ha gouest da labourat a-stroll - Gopr hervez emglev ar c'hazetenniñ - Kaout un aotre-bleniañ hag un oto

Darempred : Kas ur CV hag ul lizher emginnig dre bostel a-raok an 8 a viz Gwengolo 2024. An emgavioù tuta a vo d'an 19 a viz Gwengolo 2024. contact@radiobreizh.bzh hag Alan Kloareg, prezidant Brudañ ha skignañ a.kloareg@gmail.com

BARZHONIEZH

gant Gwilherm

Tro-dro ar rouanez

Un nozvezh vrav eo gant pikoloù banveziou Koulskoude e vo diskuliet kalz sekredoù Diwallit gant ar pezh a lârit d'ar re all Ar rouanez a oar. N'eo ket na bouzar na dall.

Instagram Gwilherm : @mare_skrivet

TI AR VRO GWENGAMP ZO O KLASK

Emañ Ti ar Vro Gwengamp o klask ur sekretour.ez - Kontour.ez divyezhek hag a labouro evit ar brezhoneg ha sevenadur Breizh.

Kefredioù : Ober war-dro an degemer, sekretouriezh ha kontouriezh vihan ar gevredigezh.

Diorroet e c'hallo bezañ ar post hervez barregezhioù war dachenn ar vuhezouriezh e magourioù, e Tier ar re gozh.

Doare den : - Bezañ emren, urzhiet ha kempenn, barrek da aozañ ha kenurzhiañ

- Ober gant binviji burev, skridtreterezh, taolennarioù, mediaoù

- Bezañ en e/he aez evit an darempredoù e brezhoneg hag e galleg

- Anavezout sevenadur Breizh ha bed ar c'hevredigezhioù a vo deuet mat

- Bezañ en e/he aez ha plijet gant al labour a-stroll ha barrek d'en em azasaat buan ouzh un endro labour nevez

Kevrat : didermen hanter-amzer.

Gopr : Smic. Aozadur al labour war ar sizhun da vezañ resisaet

Post-labour da bourveziñ : adalek ar 1^{añ} a viz Gwengolo 2024


Lec'h labour : Gwengamp (22)

Darempred : Ma'z oc'h dedennet kasit ho lizher emginnig dornskrivet, ho CV gant ho poltred a-raok an 31 a viz Eost 2024 da :

Aotrou Prezidant - Ti ar Vro Gwengamp, 3 Maez ar Roue / 3 place du Champ au Roy 22200 Gwengamp pe dre bostel : kenurzhierzh@tiarvro-gwengamp

GANT DRIG

ME A LAMM HA GANTAÑ E YA AR VEDALENN ...



STAJ KAN KEAV

Aozañ a ra KEAV ur staj kan hollvrezhonek e Plouneour Menez d'an 12 ha d'an 13 a viz Here 2024. Kaset e vo en-dro gant Joel

Kerne ha Gi Peñseg. 20 den d'ar muiañ a vo degemeret. Muioc'h a didouroù a gavoc'h e lec'hienn KEAV hag e

Facebook : - https://www.keav.bzh/stajou/staj-kan - https://www.facebook.com/share/DW8YBK5ocim6cfig/

KENWETURIÑ ?

Oye Oye. Ma merc'h Maïann az aio da lise Diwan Karaez adalek miz Gwengolo. E Langoned emañ o chom ha n'eus karr-boutin ebet etre Karaez ha Langoned/Ar

Faoued d'an eur ma vo echu ar c'hentelioù ganti. Piv a zafe kuit eus Karaez e-tro 6e30 GM da vont tromsa Langoned/Ar Faoued (hent An Oriant-Montroulez)

adalek miz Gwengolo ha kontant o sikour ur vrezhonegerrez yaouank ? Trugarez. lecuyer.fabien@gmail.com

Ya !, Sizhunieg Journal hebdomadaire N° 1003 du mardi 27 août 2024 2 € an niverenn / le n° 100 € ar bloaz / l'année N° CPPAP : 0622 C 86790 Embannet gant / édité par : Keit Vimp Bev, 29 520 LAZ 02 98 26 87 12 Rener. embann / Dir. publication : G. Gwenn, darempred@ya.bzh Kenurzhiañ & maketenniñ / Coordination & mise en page : N. Gourvenneg, nikolaz.kvb@gmail.com Koumanantou / Abonnements : M. Gallais, keit-vimp-bev@wanadoo.fr

Skoazell adlenn / Aide à la relecture : OPAB / OPLB



Moullañ / Impression : Le Télégramme 7 voie d'Accès au Port, BP 67 243 29 672 Montroulez/Morlaix Cedex Ar pennadoù sinet ne engouestlont nemet kiriegezh ar re o deus o skrivet.



KOUMANANTIÑ

☐ Dre chekenn : 100 €/bloaz, war anv Keit Vimp Bev

Kasit an tamm paper-mañ gant ho chekenn da : Keit Vimp Bev - 22, Grand Rue - 29520 Laz // Gouzout hiroc'h : 02 98 26 87 12

Anv :

Anv-bihan :

Chomlec'h :

Chomlec'h postel :@.....

Niverenn bellgomz :

☐ Dre lamadenn : 8 €/miz (= 92 €/bloaz)

Evit pellgargañ ar follenn goumanantiñ pe kaout muioc'h a ditouroù : www.ya.bzh/koumanantin

Ya!, ar gazetenn vrezhonek embannet gant Keit Vimp Bev abaoe 2005 !

UN EMGAV GANT



ANNA AN DUIGOU

Emañ o labourat en un aozadur kevredigezhel hag a ro bod diwar vall d'an dud a bellgomz d'ar 115 evit kavout repu.

Peseurt studioù ha peseurt hentad ho peus heuliet ?

Bet on bet e Diwan, deus ar skol-vamm betek ar vachelouriezh. Goude-se 'm eus graet studioù war an istor e Tolosa, tapet 'm eus un DEUG e skol-veur ar Miralh. En em droet on war-zu ar sokial en ur dremen ur BTS ekonomiezh sokial ha familh hag un diplom Stad. Kuzulierez war an ekonomiezh sokial ha familh on bremañ. Bon, evit lâ' ar wirionez eo tostoc'h va labour da vicher un edukatourez. 'Fin, labourerez sokial on.

Peseurt kefridioù ho peus war ar pemdez ?

Degemer a ran an dud digledourek (*sans-abri*) o deus pellgomzet d'ar 115 hag a zo deuet a-benn da gaout ur plas da gaout repu. Kavout a reont bod ha boued e-pad pemzektez, noz-deiz. Seizh den a c'hellomp degemer d'ar muiañ er memes tro, maouezed ha gwazed. Pemp kambr hiniennel zo, hag unan evit koubladoù. Aotreet e vez ar chas. Ar pal pouezusañ eo ober al liamm sokial. En ur flapañ, pa vezomp o c'hoari ping-pong, biroùigoù elektronek pe o keginañ asambles, da skouer.

Petra eo ar plijusañ en ho labour ha petra eo an diaesañ ?

Perzhioù plijus zo, evel-just, met n'eo ket aes atav. Klevet 'vez istorioù kriz ha gwelet tud en arvar bras, e-keñver yec'hed ha sujidigezhioù (*addictions*) dreist-holl. Alies hor bez ar santimant da chom hep gallout ober kalz

traoù evit sikour an dud en gwirionez. Met dalc'het 'vez da vont peogwir eo pouezus ar pezh a c'hellomp degas dezho memes ma seblant bezañ munudoù. Broudañ a reomp an dud da vont etrezek ar MAJ, an Ti degemer war an devezh. Eno e vezont degemeret gant keneiled din, er servij "ambrougerezh hag hentañ", ur glañvdiourez en o-zouez.

Hag gant ar gevredigezh AFPS (Kevredigezh Frañs-Palestina Kengred), petra eo ho kefridioù ?

Gant ma c'hamaraded deus ar strollad AFPS 85 (Vande) e aozomp prezennoù, skignadennoù, filmoù ha divizoù. Ar pal eo kontañ ar wirionez diwar-benn ar pezh a c'hoarvez e Palestina ha mont a-enep ar gevier kontet gant ar mediaoù gall, e-touesk reoù all. Ar re-se zo kablus ha kiriek ivez deus ar gouennlath a zo war ober pa respontan deoc'h amañ. Deuet e oa ar breutaer Salah Hammouri da gomz deomp diwar-benn e frankiz mouget. Hemañ zo palestinian ha gall war an dro, ha toullbac'het eo bet e-pad ouzhpenn 10 vloaz gant Stad Israel. Diwar c'haou ar wech kentañ, diabeg hag hep prosez da c'houde. Jahinet noz-ha-deiz kement hag ober. Skrivet en deus al levr "*Prisonnier de Jérusalem. Un détenu politique en Palestine occupée*", embannet gant Libertalia. Sarah Katz a oa deuet ivez, evit komz diwar-benn eil film

Roland Nurier "*Yallah Gaza*" dre ma kemer perzh ennañ. Difenn a ra mennozhioù ar c'hevredigezhioù Unaniezh yuzev gall evit ar peoc'h (UJFP) hag International solidarity movement. Kontet he deus he buhez e Gaza hag an degemer graet dezhi evel Yuzevez gant ar Balestinianed. Stourmerzh enep-sionist eo ha redek a ra dre Vro-C'hall evit kinnig ar film ha difenn groñs gwirioù ar Balestinianed.

Evit brudañ ar c'hengred etrebroadel ha stourm a-enep gouarnamant Israel a zo deus an tu dehoù pellañ, e aozomp ur vanifestadeg bep Sadorn vintin e la Roche-sur-

Plijout a rafe kalz din mont betek Kanaky, met pa vo digabestr, da lâret eo pa vo dijablet deus beli Bro-C'hall. Ur vro ken brav e seblant bezañ.

Petra a blij deoc'h ober evit aveliñ ho penn goude ur frapad labour tenn ?

Mont da liorzhañ dindan selloù kurius hag aketus va yer, ha sankañ ma daouarn en douar, traken.

Peseurt levr a yafe ganeoc'h war un enezenn didud ?

Levr nevez va c'hoar Loeiza, "*Kali Torrdent*", troioù-kaer ur vorlaerez, na'm eus ket bet tro da lenn c'hoazh. War un enezenn didud e klotfe mat gant an aergelc'h a gav din.

Petra eo ho "plijadur" bemdez ?

Plijout a ra din mont da gerc'hat vioù va yer : Regina, Pancha, Bolchinwa ha Lududu.

Gant peseurt den anavezet pe pas, bev pe marv, ho pefe c'hoant da dremen ur frapad amzer ?

Plijout a rafe din kejañ gant Angela Davis, bev eo atav, marteze e c'hoarvezo, piv 'oar ?

Peseurt donezon ho pije bet c'hoant da gaout ?

Nijal evel ul labous ha foetañ-bro en ur ganañ. Dre an donezon-se, gwelet ar bed

e-giz ma vefe ur vaketenn divent.

Petra zo en ho kerz, un dra didalvoud oc'h tomm-tre outañ, ha na rofec'h da zen, e mod ebet ?

Ur boupinell graet gant pilhoù bet fardet din gant va Mamm-Baour pa oan bihan. Mamm-baour a vez graet deus ar Vamm-gozh kostez Lannejenn e bro-Gerne.

Petra eo ar c'hrennlavar a blij deoc'h ar muiañ-tout ?

"Hep justis, peoc'h ebet", ur wirionez hollvedel eo, a dalvez evit Palestina hag evit kement darvoud all. Eus porzh ar skol betek an dud drouklazhet gant ar polis, pe 'vefe e Bro-C'hall pe e lec'h all, da skouer. Mab-den zo sañset bezañ gouest da gaout frammoù evit lakaat ar justis e pleustr. Ha gwirioù etrebroadel ivez sañset.

"Da bep labous e gan, da bep pobl he yezh" zo ur c'hrennlavar hag a blij din ivez. Siwazh em eus kollet an t-shirt a oa bet graet gant Skol an Emsav pell zo hag a oa skrivet ar frazenn-mañ warnañ.

C'hoant ho pefe da gas ul lizher gourc'hemenoù. Da biv e kasfec'h anezhañ ha perak 'ta ?

Da bobl Palestina. Ur bobl galonekeo. Spontus-meurbet eo ar pezh a vez graet dezho dindan selloù ar bed.

Da beseurt gouenn ho pefe c'hoant da respont "Ya!" ?

Daoust hag-eñ e vo Palestina dieub en-dro ?

“ Ar pal pouezusañ eo ober al liamm sokial. ”

Yon abaoe miz Here.

Peseurt lec'h ho pefe c'hoant da reiñ da anavezout d'ar re all ?

E reter Vande, kostez Koad Mervent, Fontenay-le-Comte, Vouvant ha Faymoreau, e lec'h ma oa minoù glaou. Ur mirdi zo bremañ hag ar gêriadenn zo damheñvel c'hoazh, padal, n'eo ket ur gêriadenn "mirdi", tud zo o chom du-se c'hoazh. Marteze e plij din peogwir ne denn ket da aodoù Vande, e lec'h ma vez an dud kozh ha pinvidik, a fell dezho ur vuhez seder ha sioul etre tud damheñvel. Ar pezh n'eo ket kliched e mod ebet neketa ?

Peseurt bro ho pefe c'hoant da weladenniñ ?



EN ARVAR EMAÑ KEIT VIMP BEV !



Penaos sikour ac'hanomp ?

Kemerit perzh en dastumadeg arc'hant !

Koumanantit, brudit hor c'helaouenoù, komzit ac'hanomp !



bit.ly/sikourKVB

Dre chekenn ?

ma kavet gwelloc'h dre chekenn e c'hellit kas anezhi da :
Keit Vimp Bev, 22 Grand Rue, 29520 Laz